


GLOAR DA JESUS !

Kantik evit Nedelek




Ka-nomp hi-rio, Kris-te-nien, da Je-sus hor Zal - ver,



Hi - rio ga - net e - vid-homp en eur c'hraou-ik dis - ter,



Ka-nomp holl a greiz ka-lon, ka-nomp holl a - sam - blez :



He - nor, gloar ha meu - leu - di, dou - jans ha ka - ran - tez !

Jesus, Mab an Eternel, gwir den ha gwir Douë,
 Ni ' grêd ez oc'h hon Aotrou, hor Mestr hag hor Rouë :
 Pe var vreac'h Ho Mam zantel, pe var ar plouz kalet,
 Ni ' wêl, stouët d'hon daoulin, hor Zalver benniget !

KANTIK EVIT NEDELEK

Bennoz bepred d'Heoc'h, Jesus, a zo deuet e'r bed-ma
Evlit tenna divarn-homp pec'hed hon tud kenta,
Hag hon bleina holl goude var hent ar Baradoz...
Oh ! na pebez karantez : bennoz, Jesus, bennoz !

Siouaz, beteg-hen, Jesus, hor c'halon baonr ato
Ien-sklaz ' zo bet 'n ho kenver ha kirleg d'Ho maro ;
Mez, gant skoazel gras Douë, e 'n amzer da zoned,
Ni ' vo fidel d'He lezen, gant heuz ouz ar pec'hed.

Ouspen, p'e gwir e chomit gan-heomp var an Aoter,
Ni ' zeui' beb miz d'Ho reseo gant eur galon dener ;
Gan-Heoc'h, Jesus, 'n hor c'halon, ni ' vo pur ha santel,
Ha gant aked ni ' heullo lezen an Aviel !

Henor, gloar ha meuleudi d'hon Douë benniget,
Tad, Mab ha Spered Santel, tri Ferson an Drinded !
Ia, gloar e barr an Nenvou d'hor Mestr holl-c'haloudus,
Ha gwir beoc'h var an douar da ziskiblien Jesus !

Amen.

IMPRIMATUR :

Corisopiti, die 25a Decembris 1915.

Aua. COGNEAU, v. G.

Ce petit cantique. — composé, comme le *Kantik ar Vrezel*, sur un vieil air breton. — est en vente aux bureaux du *Courrier*, rue du Château, à Brest, et chez le R. P. TRÉBAOL, O.M.I., Ecole du Likès, à Quimper, aux prix suivants :

1 ex., 0 fr. 05 ; — 12 ex., 0 fr. 50 ; — 25 ex., 1 fr.